



331. un signet den sliw

GHANSON

AR

SEIZ SQIENT NATUREL.

Voar un un agreab.

1. Apollon, Mercurius, Venus ha Jupiter,
C'houi a delc'h var an donar an amitie sincer,
Hag a ra d'an dud-yaouanq en em garet parfet,
Prestet d'in hoc'h ajistanc, me ho ped, eur momet.

2. Sperejo celestiel, astro ar firmament,
Me a deu d'hoc'h implori, gand eur galon ardant,
Da rei d'in an talancho a bere'm eus ezom
D'espligan ar propojo arretet em talon.

3. Abostolet evurus, hanvet an Ebestel,
C'houi a ro instruction d'ar ghristenien fidel;
Pa'n oc'h choaset gant Doue vit prezeg he lalen,
Chilaouet he grouadur, exaucet ma feden.

4. Rouanes an amitie, princes ar moñandis,
Moïses ha Jeremi, chefo deus an Ilis,
Ha c'houi, carante dener, zourcen an delien,
Deus a gomso eloquant ramplisset ma gueno.

5. Ne c'houlenan qet antren 'bars en theologi,
Na mont da guemer affer ous an dud a studi,
Ar belec, an arc'hescop hag un den a blien
Ne garfent qet'n o enor divanqan un asen.

6. Breman c'houlenan avis an autoriteo,
'Vit n'o devo qet a lec'h da reproch ma c'homso,
Hag evit cavet repos da furchal ma speret,
Ec'h an d'antren en ilis, lec'h on bet badeet.

7. Patrones ar barous-man, ma c'harante divin,
Prosternet on dira-z-oc'h var beno ma daoulin,
Juntet ganin ma daou zorn, digor ma daou lagad,
O sellet trezeg an env da c'houlen ar mennad.

8. Guir Vab an Tad eternal, ma Salver admirab,
Me so deut d'hoc'h adori beteg ho tabernacl;
Disqennet, mar plij, gannoc'h, eur sell a drugare
Var an hini disteran eus ho pugale.

9. Me a so un den yaouanq zavand ha disourci,
'Boue an oad a daouzec vloa on poursu ma studi,
Am eus c'hoant da disclerian ma bue malerus;
Mar manqan dre ignoranç, a c'houlenan escus.

10. Me ho supli, Genitor, mestr ar scrivagnerien,
Croguet breman 'bars em dorn, conduet ma fluen;
Ha c'houi, tad ar sclerijen, poset var ma speret,
'Vit ma scrivin pen-da-ben ma bue dremenet.

11. Mar'm ije bet un talant 'vel en defoa sant Paul,
Hag eur voes qen agreab evel eur roussignol,
Da riman eur son neve, me laqje ma speret,
En enor d'am mestres coant, ma guir vuan caret.

12. Mes me a c'houlen faveur, qent 'vit comanç
Bouanes an oll ele hag hini ar Messi, (ganti,
Ar seiz sqient naturel hag ar seiz planeden,
Da rei d'in o ajistanç da boursu ma reglen.

— 3 —

13. Me'm eus choaset 'vit mestres fleuren ar yaouan-
Brillantoc'h evid ar ros ha 'vid ar fourdelis, (qis
Agreaploc'h da barlant 'vid an ele memes ;
Gredan qet e man he far 'bars er rouanteles.

14. Qentan'm oa bet an enor da velet ma mestres
A oa en pardon sant Min , gand he c'hamarades ;
O vale hag o bourmen evid he fassetans :
Eno e defoa piqet ma c'halon gand eul lanc.

15. D'ar c'houlse me oa yaouanq o comanç studian,
O boursu ma avantur mesq ar re zavantan ;
Ma c'hor a vije er scol, mes allas ! ma speret
Gand ar boqet florissant a vije occupet.

16. Demeus an oll scolarien, me oa, en assuranc,
Ar c'hentan, ha goude se ne oan qet 'vit avanç.
Ha me o sonjal, un de, monet beteg he zi,
Gand eur gaon languissant, da veled anezi.

17. Me ho salud, merc'h yaouanq, objet ma c'harante,
Me a so deut d'ho cavet an devez a hirie,
'Vit laqâd un tam amser, mar be d'ho fantasi,
Da gontan d'ac'h ma doare ha clevet o hini.

18. Den yaouanq leun a furnes, me ho salud ive,
'Vel m'en defoa gret goejall ar sent hag an ele,
Pere ie var o daoulin dirag ar Messias,
Var lein mene Calvari, pa oa touguen he groas.

19. Ober ret d'in un enor hag a so agreab,
Gand ho comso familier hag ho bolonte vad ;
C'houi eo an hini garan muan, en assuranc :
Nemet da Zoue hepquen ne rofen preferanc.

20. Sellet Roue an envo en eur gadoar voen,
Var lein mene Sinaï, ho scrivan he lesen,
Dre behini e tifen ous he oll vugale
Donet d'en em draïssan an eil hag eguile.

21. Me lar d'ac'h en guirione aman, ma servijer,
Oc'h eus goneet ma c'halon dre gomso saluter;
Ha, pa gaffen mab eur prinç, evel ne gavin qet,
Ne desiran nemedoc'h 'vit bean ma fried.

22. Ho propojo ravissant a blij d'in, ma mestres,
Ha rejouiss ma c'halon, ma n'oc'h qet traitoures;
C'houlenan netra dianac'h, qent evid ho quittä,
Evid ar veaj qentan, 'met beañ'n ho craç vad.

23. Arsa 'ta, ma servijer, couls eo d'imp finissan,
Me a deu da laret d'ac'h qen a vo ar c'hentan,
Ous ho pidi da retorn hep dale d'am guelet,
Ma graç vad a vo ganac'h partout lec'h ma'c'h efet.

24. 'Vid an-eil guech, a gredan, me so vont da vale.
Gand eur speret qen contant 'vel hini an ele,
Da velet ma mestres coant, rouanes ma c'halon.
Pini'n deus ma ramplisset a gonsolation.

25. Bonjour ha joa, ma mestres, rouanes ar fleurio,
A guement so bet biscoas plantet ebars er vro,
Brillantoc'h evid an heaul, scleroc'h evid al loar,
Puissantan merc'h yaouanq a so var an douar.

26. Me a garje bean bet eloqanç Ciceron,
Peautramant ar furnes en defoa Salomon,
Eur gueno gret en arc'hant hag un teaud alaouret,
Da barlant en ho presanç evel ma veritet.

27. Pa'z oc'h deut beteg aman dre garante barfet,
Me a rent d'ac'h ar salud gand enor ha respet;
'M ije gouvet ar feçon hag an tu de barlant,
A vije ma brassan joa plijout d'ho santimant.

28. Mes me so eur plac'h yaouanq'n eus ar speret dis-
N'en on qet bet studiet 'veldoc'h, ma servijer: (ter,
C'houi a oar scrivan ha len ha me n'hen ouzon qet,
N'allan qet coms eveldoc'h; rac se ma escuset.

29. Ma mestres, c'houi so furoc'h evid ar Salomon,
Ma vije permetet d'in digor d'ac'h ma c'halon,
C'houi'n ije guelet enni gravet an amitie
Pini am eus evidoc'h gant guir humilite.

30. Ma qeret, a vemp hon daou unisset assemblies,
Evel ma oa sant Joseph hag hon mam ar Verc'hes;
Mar-g-allan ho possedi un de var an douar,
Ma a veso qen joaüs 'vel an ele er gloar.

31. Me a so eur femelen dister a galite,
N'on qet ingal'n ho qenver en mado, en ligne,
Mes mar-g-eo predestinet gant Doue eternal
A vemp hon daou unisset, ne c'houlenan qet voel.

32. C'houi eo fleuren ar merc'hed a guement so'rc
Chilaouet, mar plij ganac'h, me ho ped, a galon ('hanton
Moes an hini disteran deus ho servijerien,
A c'houlen eur mouchover pe un dabatieren.

33. Evid merq a amitie, ma servijer fidel,
Ez an da glasq an alc'hoec'h da dieri'n armel,
Hag a vije ma c'halon ho pije goulenet,
Ma vije possub he rei, 'm oa qet ho refuset.

34. Tostaet aman, me ho ped breman, ma servijer,
Cetu aman var an daol pevarzec mouchover,
Ha peder dabatieren olifant zoulaouret,
Ar choas a so evidoc'h, hag ouspen, ma qeret.

35. Me ielobreman d'ar guer gand eur galon gontant
Pam' eus guelet, ma mestres, ho carante ardant;
Ha, mar partaget ganin lod deus hoc'h amitie,
Me a respeto anoc'h en durant d'am bue.

36. Qen vo'ta, cloarec yaoanq ha ma brassan mignon,
Hoc'h aviso cloqant a raviss ma c'halon;
Deus a guement den yaoanq'n eus ma darempredet,
N'em eus caret nemedoc'h'boe m'oc'h deut d'am guelet.

37. Ma mestresso'r plac'h yaoanq hage deus blev me-
Ha daoulagad qen ardant evel div stereden ; (len
Hennes en deus ar pouar , gand he selo mignon ,
Da rei d'he muan caret ar recreation.

38. Salud d'ac'h , ma mestres coant , gand enor ha
Me so deut beteg ho ti gand eur galon barfet , (respet ;
Evel ma oa et goejal ar profet Daniel
Bete dor ar barados da barlant ous un el.

39. Dre grommandant Doue evit goulen ar c'hraç
Da vevan en he repos ebars un hermitaj ;
Mes , allas ! me so un den a so has a speret ,
N'on qet capab da barlant evel ar profedet.

40. Me ho ped , ma servijer , cesset ho complimant ,
Ho tiscourio admirab hag ho comso charmant ;
Rac pa sonjan em speret er pes em eus clevet ,
Paneverd hoc'h ajistanç me'm oa disesperet.

41. Me ar lar d'ac'h , ma mestres , leun a gonfusion ,
C'houi'm oa laqet porcheres var doul dor ma c'halon ,
Hag ouspen se an alc'houe var ma oll segrejo :
Ne garan hini 'medoc'h a guement so er vro.

42. N'oufac'h biqen , ma mignon , me a lar d'ac'h aman
Caroud anon , a-dra-sur , muoc'h 'vit n'ho caran ,
Couscoude gant ma c'herent me a so difennet ,
Dre ma eo bet ar goal-deaud o prezeq'n hoc'h enep.

43. Qelo trist hag effroyap , grevus ha direson ,
Te a bland eur c'hleve noas 'bars en creis ma c'halon :
Eur vatimant am oa gret hag a so dispennet ,
Birviqen var an douar ne repos ma speret !

44. O Majeste infinit , ma Doue , ma C'hrouer ,
Diganac'h a c'houlenan ar c'hraç barticulier ,
An ners hag ar buissanç rojac'h d'an intanvez
Da distrujan gand he dorn roue Holophernes.

45. C'hoas a c'houlenau ouspen, qis un den a verit,
Oll dalancho ar profed hag ar roue David,
'Vel m'en defoa gret goejall, qent disqen d'ar blenen,
A ampereur Bonapart hag he officerien.

46. Ma'm ije bet ar pouar hag ive ar buissanç,
Evel'n defoa sant Louis, pa oa roue en Franç,
D'exilan ar goal-deaudo deus ar rouanteles,
Em ije gret an hanter deus ma silvidignes.

46. Lennet ar Scritur santel, me ho ped, ma mestres,
Hag a caffet rapportet, var Lever ar Furnes,
An neb a gred goal-deaudo, so diavis ha foll;
N'eman get var an douar an hini blij d'an oll.

48. Maleurus eo an hini a so var an douar,
Mar deu dean'n nep feçon da goea'n o fouar;
Ha, sioas! qazi an oll, abred pe divezat,
En peb amser eo stignet ar pecho miserab.

49. Ar pab en he gathedral, ar roue var he dron,
An Avocat'n he studi, ar beleg o sarmon
Hag ar barner aseet qichen he dribunal
So sujet d'ar goal-deaudo qencouls 'vel ar re all.

50. Breman a gredan parfet ar pes am eus lennet
En eul leür ancien gret gand ar brofedet,
Eo qen difficil bevan divlam var an douar
'Vel mont da fonç ar mor bras ha reorn var ar bar.

51. Pa dei messajer Doue da draouïen Josaphat,
Da separi ar re fall deus a vesq ar re vad,
Vo guelet ar goal-deaudo dirag an assemble
O vont da dan an ifern 'vid un eternite

52. Evit derc'hel ar sermant am oam gret, ma mestres
Divezan'm oam bet'n enor da barlant assambles,
Ez on dent d'ho saludi gant guir fidelite;
Mes ne c'houlenan netr enep d'ho bolonte.

53. Arretet ho propojo breman , ma c'hamarat ,
Lampâd a ra ma c'halon , birvi a ra ma goad ,
Hag evid aprouvi d'ac'h m'amitie'n hoc'h andret.
Ma qeret , ez in ganac'h el lec'h ma tizirfet.

54. Gret reflexion var se , me ho ped, ma mes'tres,
Ma'm be ho cass'et ganin en qis un esclaves ,
Ha donet d'hoc'h eureuji hep conge ho ligne ,
Se a ve reprochap d'in en durant d'am bue.

55. Mes confortet ho calon ; martese, gand amser ,
A dremeno o fulor ha teri o c'holer ,
Hag a veomp unisset gand o c'honsantamant.
He c'halon oa qer mantret qen n'alle qet parlant !

56. Maleur 'vid an den yaouanq ne leser anean
Da dimezi , p'en deus c'hoant , d'an hini blij dean !
Distrempet oa an douar eno gand hon daero ,
Qen a boullade an douar da gargan hon boto !

57. Me a deu d'ho suplian, tud yaouanq ar c'hontre,
D'unissan ho calono assambles gand hon re ;
Me'n efoa cun ha glacthar o quitât ma mestres ;
Qeit ma vin var an dour n'he ancoain james.

58. Mes Doue a lavar d'imp ebars er Scritur sacr :
Troc'han a refet torn ha tennan ho lagad ;
Gueloc'h eo mont gand un dorn d'ar joaio evurus ,
Evit n'en deo mont gant daou d'ar flammo malerus.

59. He zad a lavaras d'in : cetu aman'l lizer ,
Pehini'm eus recevet digand ar messenger ,
Hag em eus commission da rei anan d'ac'h ;
Lequet-an en ho codel ha qesset-an ganac'h.

60. Slerijen an oll astro , to so hanvet al loar ,
Disqen ebars em c'halon ha disec'h ma glac'har ;
Mar permet ma daoulagad arreti ma daero ,
Da raporti eur guentel enep d'ar goal-deaudo.

61. Te'n efoa roët avis , teaud brutal ha funest ,
D'hon tad ha d'hon mam qentan , er barados terrest ,
Da dibri dimens ar freus difennet gant Doue.
Se so qiriec d'hon miser ha d'hon oll baourante.

62. Bars en prison Pharaon te en defoa plantet
Joseph , ar santelan den deus ar patriarchet ,
Pa oa bet faos accuset gant pried Putiphar :
Boe ma eo crouet ar bed ec'h oud var an douar.

63. Te attaq an dud yaouanq memes var o enor
Gand eur voes qen eclatant a ia beteg ar mor ,
A deu da lemel diante un tensor excelant ,
Preciussoc'h 'vid an aour hag evid an arc'hant.

64. Abalamour d'he ligne ec'h espernin Judas ,
Hag avanç 'bars en histoar beteg Herodias ,
Pini gonsellass he merc'h , dre ar avis traitour ,
Da c'houlen var un assiet pen sant Ian-Vadezour.

65. Lar d'in , teaud milliguet , ma n'en oud qet con-
Bean guerset Map Doue ha dibenet eur sant ; (tant
Pa'c'h oud en pad an amser o clasq dont da laqâd
Ar mein-be var an douar da ruan gand ar goad.

66. Ne bad pelloc'h ma c'halon da brezec varnean
Pardon ha misericord a c'houlenan 'vitan ,
M'en defo cun ha glac'har dimeus he bec'hejo ,
Ha m'an em gonvertisso bete fin he zeio.

67. P'antreis em c'habinet gant desolation ;
En sell da gaved un dra a gonsolation ,
Ac'h is da len al lizer am boa bet diant he zad ,
Pa digoris anean , m'en defoa calonat.

68. Ma c'halon so glac'haret , ma Doue , pa sonjan
Bet on welet ma mestres 'vid ar voech divezan :
Roët eo d'in ma choge scrivet var baper guen ,
Ma c'houtanç en general d'he dilesel a gren.

69. Me oa tri de ha taer noz hep dibri nag evan ,
Na qen neubet hep repos : ne ren nemet goelan ,
Dre ma renqen separi , hep bean meritet ,
Deus fidelan merc'h yaouanq anavan var ar bed.

70. An drier de a scrivas qelo d'he c'hamarat ,
Ha me res dezi respont divar lizer he zad.
Prononcet eo an arret enep d'ho servijer ,
C'houi iel breman d'ar gouent ha me chomo er guer.

71. Pa oan ebars ma studi o len ma leverio ,
Ma welet qazi manqet , beuet gant an daero ,
E renqis o dilesel ha mont da pazeal ;
Ha me qemer ma fusuil 'vit mont da chasseal.

72. Arri 'bars en creis ar c'hoat me a or fatig bras ,
Ha me da guemer repos eno var ar yeot glas ,
Hag , evel eur Vadaler , commanç da déplori ,
Ne oa 'met Doue hepqen capap d'am c'honsoli.

73. En creis ma brassan glac'har o sonjal em mestres ,
Qazi 'vel dre eur miracl a velis un heies ,
En em strinpas d'an daoulin evit ma saludi ,
Inspiret a beurs Doue da dont d'am c'honsoli.

74. Me ho ped , galant yaouanq , arretet ho taero ,
Ha leqet ho confianç en crouer an envo ;
Doue a'n eus ar pouar da gohsoli an oll ,
Ha neb a fio ennan na'n ei james da goll.

75. C'houi a so var an douar 'bars en displijadur ,
N'oc'h eus defaot a netra , ma qeret bean fur ,
Ha me a so o vevan ebars er foresto ,
Hag a guemer plijadur da uzan ma deio.

76. Eno e colis memoar deus ma mestres fidel ,
Ha cridi n'oamp qet choaset gant Doue eternal
'Vit bean var an douar assembles unisset ;
Graç d'imp da vean un de en pales an Drindet !

77. Neuse retornis d'ar guer 'vel pa'm ije nijet :
Toman re ma goad ouzin , na santen qet qerzet ;
Ma speret a oa qen scanv , ma c'halon qen joaüs ,
Evel ma'c'h eo 'bars en env an ele evurus.

78. Mar boe goejall ma c'halon carguet a disesper ,
Breman me so qen eset evel un eveder ,
Pini ia beteg an env ha retorn d'an douar ;
Adieu laran d'an tourmant , achu eo ma glac'har.

79. Madelez oll-buissant , roue an oll ele ,
Me rent d'ac'h presantamant grazs a drugare ,
P'oc'h eus roët d'in ar c'hraç , roue ar firmamant ,
Da finissan ma chanson joaüs ha triomphant.

80. Homan so eur son neve rimet ha composet
Gand eur scrivagnier yaouanq dimeus a Lanrodec ,
So 'ganet ebars er bloa mil eiz cant hag ugent ,
De diaroc goel ar Verc'hes a ve 'bars en Avent.

81. Ha 'vid espliqan he noad d'an oll dud ignorant ,
Tri mis ha pevar-ugent en tu all da daou c'hant ;
Ebars en cantod Plouogat eo ganet ha maguet ,
Hag he hano scrivet mad so *Gilles Mordelet*.

82. Mar'm eus drouc-laret netra gant ma fragilite ,
G'houl'nan escus ous an dud ha pardon ous Doue ,
Hag ouspen a tisiran da guemend he c'hlevo
Ar boneur da jouissan deus a c'hloar an envo.

FIN.